

PROGRAMM ISTOR

	Lun	Meurzh	Merc'her	Yaou	Gwener
Mintin	Peur lakaat istor Breizh da gomañs ? Priñsipoù hollek an istor evel danvez skiantel.	Breizh a-dal ar Franked (750-907)	Klask un hent etre ar galloudoù (907-1202)	Dindan beli roue Bro-C'hall (1202-1341)	War hent ur Stad (1341-1514)
	Pred				
Goude merenn	Eus Arvorig da Vreizh (300-750)	Breizh a-dal ar Franked (750-907)	Klask un hent etre ar galloudoù (907-1202)	War hent ur Stad (1341-1514)	Prientiñ ar filaj

PLAÑ B (ma ne vez ket prest programm Plañ A)

Istor Breizh -> **Pal** :

Ober anaoudegezh gant istor Breizh hag ober anaoudegezh gant an istor evel danvez skiantel.

Goude bezañ termenet ar choazoù a c'heller ober evit termeniñ ur penn-kentañ da istor Breizh e welimp penaos e oa deuet ur strollad poblañsoù a-orin eus Enez Vreizh d'en em staliañ e kornôg Arvorig betek ma vezo roet un anv nevez d'ar vro-se : Breizh. Gwelet a raimp peseurt darempred o doa skoulmet ar Vretoned ouzh o amezeien, dreist-holl ar Franked e deroù ar mare-se, da c'houde ar priñsipelezhioù all bet savet goude ar mare karoliñjian.

Heuliañ a raimp an hent tort en doa ganet priñsipeliezh Breizh, heñvel ha disheñvel diouzh reoù kornôg ar rouantelezh amezek. Ur sell a vezo kaset war doareoù bevañ Bretoned ar mareoù-se.

EVEZHIADENN : Pleustret e vo war an danvez-se bemdez eus 9 eur betek kreisteiz hag eus 2 eur betek 5 eur goude kreisteiz, a-hed ar sizhun.

Unan eus an daou gelenner a raio war dro ar strollad stajidi en eil sizhun a zo gwenedour.

Ar stajidi o devo dibabet mont gant ur rummad diouzh temoù ne c'hellint ket kemer perzh er c'hentelioù brezhoneg kinniget diouzh live an dud.

Ret e vo dezhe kas selaouelloù ha bep a sonenrollerez a galite da labourat a-stroll pe en unan.